

~~~~~

# KANTIK

## SANT SEBASTIAN

~~~~~

Ton : Sanctorum meritis.

O Sant Sebastian, maro evit ar Feiz,
 Prijit selaou peden ar bobl demeurez a Vreiz ;
 E parrez Sant-Ségual, Iec'h ma ho relegou,
 Hor mirit deuz ar c'hilvenjeou.

Azalek goulou deiz, beteg ann noz sarret,
 Azalek ar c'huz-eol, beteg ma ve savet,
 Bep-heur hag bep-paouez, pa-z'omp e iec'h et c'hoaz
 Hor c'hendalc'hit krenv ha dinnoz.

Diouallit ac'han-homp, Merzer ken gallouduz,
 Ha pellait diouz-homp ar c'hlevet ken euzuz,
 Ar c'hlevet a zistruj hep truez na remed :
 Ar vosen e z'eo hanvet !

Prijit-ta hon difen, ni hag hor mignounet
 Deuz an oll guall-heuriou ha deuz eur-seurt klompel
 Ni, pere a amzao oc'h Jezuz hag he Vam
 Kouz hag ouz-oc'h, n'omp ket divla



C'hui, Merzer, dre moc'h bet maguet e ker Milan,
A gassaz dez ar vro eur vosen vraz, buan ;
Hag a hellaz-obten ive digan Doue,
Na zistroje keñ er vro-ze.

Zoe, eur vaouez vud, hoc'h euzc'hoaz pareet
Ha d'he goaz, Niçostrat, ar iec'het hoc'h euz rentet ;
Kement-se, hoc'h eus gret dre eur burzud ker braz
Ma ze'an oll sonezet c'hoaz.

Pa voa tud a feiz krenv, Guehall o c'houzanvi,
C'hui a roe d'he nerz enn ho merzerenti,
En eur voaranti d'e eur vyhez peur-baduz
Hag eur gurunen lugernuz.

O Sant Sebastian, Merzer leun a verit !
Keit ma vimp e buez, gane'omp ato chomit ;
D'ann drindet ha d'hor Mam, ar Verc'hez benniget,
Hor rekommandit oll bepret.

Diouallit, pareit, ha chenchit ac'han-homp,
Kendalc'bit evit mad, ar vosen pell diouz-homp.
Vit ma c'hellimp e peoc'h, meuli e pep amzer
Tad ar verzerien, hor Zalver.

Ha pa zeui Jezuz hor barner d'hor gervel,
Pa vo sonet ann heur ma vo red deomp mervel,
Obtenit m'hon d'o perz e gloar ar verzerien,
Ma velimp Doue da viken.

C'hui a vel enn envou, e touez ann oll Elè,
Kaourintin, hor patron, he vignoun Guenole,
Ho fedit evid homp, hag ivez ar zent all,
Ma teuo Doue d'hon diouall.

Dre ho pedennoù mad, ha graz hor Redemptor
Tennit ann anaoun euz tann ar purgator :
Grit ho lemel a boan, vit ma zaint d'hor gortoz
Enn eufusted ar baradoz.

Evel-se bezet great.



IMPRIMATUR

Cogisopiti, die 2 Junii 1870

EVARD,

Vic. gen.